

29/03
> 06/04 2014

ti 
douar
alrÉ

Sizhunvezh
ar brezhoneg

Semaine
du breton



SIZHUNVEZH AR BREZHONEG
gant skoazell Rannvro Breizh

LA SEMAINE DU BRETON
avec le soutien de
la Région Bretagne

e Douar Alre / au Pays d'Auray

Sizhunvezh ar brezhoneg 2014

Roll an abadennoù

Sadorn 29.03

- **Dait da ganal ha da zañsal !** (da vintin) :
 - Àr marc'had Pleuwigner. Aozet get : Koad ha Mor ha BMB.
 - Àr marc'had Kiberen. Aozet get : Armor-Argoad hag ar vreudeur Le Meut.
 - Àr marc'had Lokmariaker. Aozet get : Kelc'h keltiek Lokmariaker.
- **«Lennomp Asampl !»**, klub lenn, eskemmoù e brezhoneg. Aozet get : Kerlenn Sten Kidna ha mediaoueg Brec'h. Emgav : mediaoueg Brec'h, 10 e 30 - 12 e da vintin.
- **Kontomp ha diskontomp**, 2 e - 3 e 30 g.m., sal degemer Kreizenn Sevenadurel Athéna, an Alre. Kontadennoù e brezhoneg ; Troet àr ar prim. Aozet get : Ti Douar Alre ha Kreizenn Sevenadurel Athéna.

Sul 30.03

- **Mikrotoponomiezh ha bleuñvoù a-hed al Loc'h.** Abadenn divyezhek kaset en-dro get Patrick Dréan ; troet àr ar prim. Aozet get : Brec'h, Agenda 21. Emgav : 2 e g.m., Pont-Brec'h, hent da Stez-Anna, Brec'h.

Lun 31.03

- **Dait da ganal ha da zañsal !**, « Flashmob », 10 e 30 – 11 e da vintin, marc'had an Alre.
- **Sinadur Karta « Ya d'ar Brezhoneg »** get Ti Douar Alre, stal Breizh Ma Bro, an Alre. 11 e da vintin.
- **12vet troiad Daoulagad Breizh**, skignet e vo tresadennoù-bev e brezhoneg evit bugale skolioù divyezhek Bro an Alre, sinema Les Arcades, an Alre / Kreizenn Sevenadurel Terraqué, Karnag.
- **Abadennoù tañvaad d'ar yezh er skolioù.** Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn.

- **Abadennoùigoù dic'hortoz er spas foran**, er stalioù... e Bro an Alre. Diàr intrudu Kerlenn Sten Kidna hag Ar Vammenn.

Meurzh 01.04

- **12vet troiad Daoulagad Breizh**, skignet e vo tresadennoù-bev e brezhoneg evit bugale skolioù divyezhek Bro an Alre, sinema Les Arcades, an Alre / Kreizenn Sevenadurel Terraqué, Karnag.
- **Abadennoù tañvaad d'ar yezh er skolioù**. Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn.
- **Abadennoùigoù dic'hortoz er spas foran**, er stalioù... e Bro an Alre. Diàr intrudu Kerlenn Sten Kidna hag Ar Vammenn.

Merc'her 02.04

- **Abadenn e brezhoneg** e kreizenn dudi an Alre. Aozet get : Kuzul Skoazell Skol Diwan An Alre ha kreizenn dudi an Alre.*
- **Abadennoùigoù dic'hortoz er spas foran**, er stalioù... e Bro an Alre. Diàr intrudu Kerlenn Sten Kidna hag Ar Vammenn.

Yaou Jeudi 03.04

- **Dait da ganal ha da zañsal !**, d'abardaez-noz, marc'had an Alre. Aozet get : Klub soniñ KSK.
- **Abadennoù tañvaad d'ar yezh er skolioù**. Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn.
- **Abadennoùigoù dic'hortoz er spas foran**, er stalioù... e Bro an Alre. Diàr intrudu Kerlenn Sten Kidna hag Ar Vammenn.

Gwener 04.04

- **Dait da ganal ha da zañsal !**, da vintin, marc'had an Drinded. Aozet get : Mein, Mor ha Lann e Bro Karnag, skol publik an Drinded.
- **Filaj kanal** (e brezhoneg hag e galleg) ; leurenn digor. Bar Breton, Bourc'h Karnag. 8 e 30 g.m. Aozet get : Mein, Mor ha Lann e Bro Karnag, Ti Douar Alre. A-vad.
- **Flashmob**, 6 e 30 g.m., Sant-Sten, en Alre. (da gadarnaat)
- **Abadennoù tañvad d'ar yezh er skolioù**. Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna, Ar Vammenn.
- **Abadennoùigou dic'hortoz er spas foran**, er staliou... e Bro an Alre. Diàr intrudu Kerlenn Sten Kidna hag Ar Vammenn.

Sadorn 05.04

- **Devezh-studi e brezhoneg** – troet àr ar prim – en-dro d'an tem : « Dour ha douar ». 6 prezegenn get klaskerion, kelennerion skol-veur..., 45 mn pep unan anezhe (displegadenn hag eskemmoù get an dud) ; roll ar prezennoù da zonet. Aozet get : Ti Douar Alre, Kerlenn Sten Kidna. Emgav : 9 e - 17 e ; añfiteatr lise labourerezh-douar Kerplouz, an Alre. A-vad.
- **Ar skrivadeg**. Aozet get : Emglev Bro Gwened ha Ti Douar Alre. Emgav : Gwened ; skolaj Menimur, 14 e d'enderv.
- **Dorioù Digor skol Diwan an Alre**. 8 e 30 –11 e 30 da vintin.

Sul 06.04

- **Dait da ganal ha da zañsal !**, da vintin, marc'had Karnag. Aozet get : Mein, Mor ha Lann e Bro Karnag.
- **Foar an traoù kozh Diwan an Alre**, 9 e da vintin – 6 e g.m., stad ar Bel-Air, an Alre.

** Kinniget e vo un abadenn e kreizenn dudi Pleuwigner (d'ar merc'her 9 a viz Ebrel, deiziad da gadarnat), aozet get : BMB, skol Diwan an Alre, kreizenn dudi an Alre.*

Obererezhioù a-hed ar sizhunvezh aliet deoc'h get Ti Douar Alre

- Dorioù-digor diabarzh àr an hentenn divyezhek e-barzh an 12 skol e-lec'h ma vez kinniget ur c'hursus brezhoneg-galleg e Bro an Alre. Pal : lakaat ar vugale skoliataet e galleg nemetken da gompren petra 'zo a-dreñv ar frazenn simpl-mañ : «Me 'zesk brezhoneg er skol». Da bep skol an hini eo da aozif hec'h abadenn.
- Kinniget ez eus bet da gêrioù kumuniezh-kumunioù Bro an Alre plantif un dervenn da geñver ul lid bihan, a-benn diskouez o fiziañs e chomo bev ar brezhoneg a rummad da rummad.
- Kinniget eo bet da razh kumunioù ar gumuniezha da vanniñ àr o fannelloù elektronek logo Sizhunvezh ar Brezhoneg hag un toullad troioù-lavar displeget. Kit bet savet get Ti Douar Alre.
- Kinniget ez eus bet d'ar goñversanted pegsunioù divyezhek da begif en o stal (Kenavo ! / Demat !...). Kit bet savet get Ti Douar Alre.
- Kinniget eo bet d'an div gazetenn bemdeziek da embann ur pennad é tenniñ d'ar yezh bemdez, meni rubrikennoù «Sizhunvezh ar Brezhoneg». Danvez savet dezhe get Ti Douar Alre.
- Skignet e vo a-vras ur merk-pajenn, skrivet àrnezhañ chomlec'hioù skolioù divyezhek ha skolioù-noz Bro an Alre, e-lec'h ma c'hello pep hini kavout ul lec'h evit deskiñ ar yezh.